

Stourmad ar C. I. D./22

(27 mae — kenta a vezeven, 1918)

47-

Abaoe fin ebrel e oamp en em gavet
War talben ken brudet « Hent an Itronezed ».
An darnvuia diouzomp 'lavare 'n o c'halon,
O welet eur seurt lec'h, deuet sioul-eston :
« Pebez kemm, va mignon ! Sonj, eta, warlene
Pa strake bouliji, kanoliou noz-ha-de. »

Hanteret 'benn-neuze miz ar Werc'hez Vari,
Miz an Nevez-amzer, ma karomp holl pedi,
Hag ar zoudard, er foz, a helle 'hed an noz
Sonjal e Breiz-Izel, en e dud, 'n e Zent koz.
Met, dirag hon foziou ar Voched villiget,
Hep paouez tamm, bemdez 'zigase soudarded.
Ar sioulded en talben n'helle ket padout pell ;
Tost e oa da goueza warnomp eur barr-avel....

'Kreiz noz, etre ar c'houec'h hag ar seiz warn-ugent,
Obuziou a bep seurt a voe taolet kement
Ma seblante an oabl beza sklêrijennet
Gant eul lano iskis a dan hag a luc'hed.
Ha ni, war an adrenv, 'zelaoue gant enkreuz,
O c'hortoz, red ma oa, eun dra bennak nevez.

Da greisteiz, sed eun urz o tont d'eomp : « Grit ho sier,
Hag en em zalc hit prest d'en em ganna emberr. »
Ha, raktal, setu-ni o staga d'al labour,
Nerzus, dare da stourm stard ouz an enebour.
Rôet voe d'eomp eta pourveziou ha tennou,
Ha da lod ac'hanomp ouspenn grenadennou.

Da zeiz eur 'n abardaez setu ni holl en hent,
Leun a galon. Tremen a reomp eur pont ; kerkent
Eur c'harr-nij alaman 'n deus gwelet ac'hanomp
Eus barr an nenv buan, hag e tiskenn warnomp.
Tak, tak, tak ! . . al labouz, izel kenan breman,
A vindrailh ac'hanomp. Tenna 'reer warnan...
Siouaz, an torfetour a gemer uhelder
Dic'hloaz, gwella ma c'hell e kemer hent ar gêr.

Setu-ni adarre o kerzet ouz ar Boch ;
Kemer a reomp foziou a-zioc'h kêr « Bazoch ».

Eno, an Alaman, eus kêr o tiboufa,
A rankas ganeomp-ni eur wech ouspenn plega.
Tremen a ra an noz. Siouaz, da c'houlou-deiz,
Deuet tud all d'ezo, 'kerzont warnomp e-leiz.
Kelc'hiet eus a bep tu, e voe red d'eomp kila
Kentoc'h eget beza ganto tapet. Ni 'ta
A yeas pelloc'h c'hoaz war vord eur gêriaden
« Menez Itron Varia ». Eno e talc'hjomp penn,
Ha soudarded Gwilherm, a-vernion gourvezet,
A zeskas petra eo stourm ouz ar Vretoned.

Eno, eur wech all c'hoaz, ar Boch a arsailhas ;
Eur glao a vouliji warnomp holl a gouezas...
Gant eur galon dispar neuze hon eus stourmet,
Met a-zehou hag a-gleiz a nevez 'omp kelc'het.
A drenv ! « Cierge » ha « Chéry-Chartreuse » ganeomp treuzet,
War hon zeulion a-diz e teue ar Voched ;
Rak « Fère en Tardenois », kêrig eus ar brava,
Digant o fennou bras o deus urz da dapa.
Met, a-raok he c'hemer e rankint kaout kollou.
Dirag ar gêriaden e strak stank an tennou.

A-zav e chom ar Boch ; an trec'h a zo d'eomp !
En noz 'teuas re-all da zével ac'hanomp.
Gant dudi, laouen-bras, e kerzomp da repoz
Goude beza stourmet kalonek deiz ha noz
E-pad tri devez leun hag e-pad teir nozvez,
Gant skuizder, heb dibri, met gant kalon ivez.

Bennoz ar jeneral a voe d'eomp kemennet,
Kroaziou-enor e-leiz, medalennou rôet.
An taol-ze a goustas buhez lies hini,
Met d'ar Boch e koustas keroc'h eget d'eomp-ni.
Boch, dalc'h sonj, en da benn, n'ez i war-raok biken
Pa vezo Bretoned dirazout en talben !
Meuleudi da Zoue en deus hon diwallet,
Hag « ar Peoc'h da viken ! » d'ar re a zo kouezet.

AR ZODARD KOZ.

War an talben, 23 a vezeven 1918.
